

PASION HOR SALVER JEZUZ-KRIST.

Ar-lerc'h bout er goapaet 'vel-se, int a lamas getañ e vantell, e wiskas dezhañ e zilh, hag er c'hasas gete da vout staget doc'h ar groaz. 'Vel mah aent er-maez a gêr, int aet ha kavet un den a Gurena, anvet Simon, hag ind a reas dezhañ dougen kroaz Jezuz. Ur wezh degouezhet el lec'h anvet Golgota, da lâret eo Lec'h ar Glopenn, e roazont dezhañ da evet gwin mesket get bistr; goude dezhañ bout en tañvaet ne vennas ket en evet. Ar-lerc'h m'oa doa er staget doc'h ar groaz, int a rannas e zilh etreze doc'h o zenniñ d'ar bilhoù. Hag int da choukiñ ar en doar ha da chom eno d'en diwall. Lakaat a razont a-dreist e benn ur skritell get penn abeg e gastiz : «Hennañ a zo Jezuz, roue ar Yuzevion». Ar un dro getañ e oa bet staget daou laer doc'h kroazioù; unan a-zehoù hag un arall a-gleiz dezhañ. Ar re a dremene dre-hont en añjulie en ur hejiñ o fenn, hag e lârent : «Hama ! Te hag a ziskar templ an Aotrou Doue hag er sav en-dro e-korf tri deiz, en em sov bremañ te-memp, mard ous Mab Doue, ha diskenn a-zoc'h ar groaz !» An Arc'hveleion, ar skribed hag an Henaouerion a rae ivez goap anezhañ hag a lâre : «Sovet en des re arall, ha ne c'hell ket anezhañ en em soviñ eñ-memp ! Mard eo roue Izrael, ra ziskenn a-zoc'h ar groaz hag e kredimp ennañ ! Fiziet en deus e Doue : daet Doue bremañ, mar kar, d'en tenniñ a boan; rak laret en deus : «Me eo Mab Doue !». Al laeron a oa doc'h kroazioù a bep tu en añjulie er sort. A-zrebi kreizteiz, daet tañvalijenn ha goloet ar vro a-bezh betek teir eur goude kreisteiz Hag àr-dro teir eur goude kreisteiz, Jezuz a laokas un taol kri en ul lâret a vouezh uhel : «Eli, Eli, lema sabaktani ?» Da lâret eo : «Man Doue, man Doue, perak e hues-c'hwi man dilezet ?» Doc'h er c'hlevet, mar a unan ag ar re a oa eno a lâras : «Setu-eñ é c'halviñ Eli» Kentizh, unan anezhe a redas da glask ur spoueenn; he soubiñ a reas e gwinegr hag he lakaas e penn ur gorzenn da ginnig dezhañ da evet. Met ar re arall a lâre : «Laok enta, da welet mar day Elia d'er soviñ». Met, Jezuz, en ur deurel c'hoazh un taol kri, a laokas e spered da dremen. Ha setu neuze gouel an templ ha reget dre an hanter ag al lein bet an diaz; an douar a gren, ar reier a faout, ar beziou a zigor ha meur a sant hag a oa o c'horf kousket eno a zihun da vev; hag é vonet er-maez ag o beziou goude Jezuz eñ-memb savet a varv da vev, e tazont d'ar Gêr santel hag en em ziskouezh a rezant da baot a dud. Mes ar c'hantenour hag ar re a oa getañ é tiwall Jezuz, pa welazont ar c'hren-douar hag ar pezh a dremene, a voe ken strafuilhet get ar spont ma lârent : «E gwirionez, an den-se a oa Mab Doue !» Bout e oa eno ivez, é sellet a-ziar bell, un tolpad merc'hed o devoe heuliet Jezuz adalek Galilea evit er servijiñ. En o-mesk e oa Mari Magdalen, Mari mamm Jak ha Jojep, ha mamm bugale Sebedea. Ar-dro serr-nnoz e tegouezhas un den pinvik a Arimatea, anvet Jojep, hag a oa ivez disipl da Jezuz. Monet a reas da gavet Pilat, da c'houlenn getañ korv Jezuz. Pilat a c'hourc'hemennas er reiñ dezhañ. Jojep a gemeras ar c'horv, er gronnas en ul linsel gwenn hag el lakaas er bez nevez en doa graet toulliñ er roc'h evitañ e-unan. Ha, goude bout rudellet ur pikol maen da stankiñ toull ar bez, e yas kuit. Met Mari Magdalen hag ar Vari arall a chomas eno, azezet a-dal d'ar bez.

An treno, da lâret eo an deiz goude an Aozadur, en em dolpas an Arc'hveleion hag ar Farizianed hag eh azont da gavet Pilat hag e lârazont dezhañ : «Aotrou, daet e zo soñj deomp en deus lâret al lorbou-se pa oa c'hoazh bev : Goude tri deiz e tihunin da vev ! Gourc'hemennit enta ma vo diwallet ar bez get surentez get aon ne zaha e zisipl da laerezh e gorf ha ne lârahent goude d'ar bobl : Savet eo a varv da vev; rak al lorberezh-se a vehe gwazhoc'h c'hoazh evit an hini gentañ». Pilat a respontas dezhe : «C'hwi a hues gwarded; kerzhit ha diwallit eñ 'vel mar karit». Monet a razont enta d'ar bez, hag int el lakaas e surentez e sielliñ ar maen hag é lakaat gwarded en-dro dezhañ.

Pennad ag an Aviel hervez Sant Mazhev (26 + 27)

En amzer-se, unan ag an daouzek, anvet Judas Iskariot a yas da gavout an Arc'hveleien hag a lâras dezhe : « Pegement a faot deoc'h-c'hwi reiñ din, ha m'el lakay etre ho taouarn ? » Ar re-mañ a bouezas dezhañ tregont pezh-argant. Hag a-ziar neuze ne glasse 'met un degouezh mat evit el lakat etre o daouarn.

Da zeiz kentañ ar Bara dic'hoell e tas an disipl da gavet Jezuz hag e lârazont dezhañ : «E-men e fall deoc'h-c'hwi ma kempennimp an traoù evit pred ar Pask ?» Jezuz e respontas dezhe : «Kerzhit e kêr da gavet an den-mañ-den, ha lârit dezhañ : Ar Mestr a ra lâret deoc'h : Tostaat a ra ma amzer hag e tan d'ho ti da ober ar Pask get man disipl.» Hag an disipl a reas 'vel m'en doa Jezuz er gourc'hemennet dezhe, hag alejiñ a razont ar Pask.

D'anderv-nnoz e oa doc'h taol get an daouzek disipl. Hag e-pad ma oant é tebriñ, eñ a lâras dezhe : «E gwirionez, m'el lâret deoc'h, unan ac'hanoc'h a ya d'am gwerzhiñ.» Glac'haret-bras e oant, hag int da c'houlenn getañ pep unan d'e du : «Ha me eo, Aotrou ?» Eñ avat a respontas : «An hani en deus lakaet e zorn genin er plad, hennezh m'en gwerzho. Monet a ra kuit Mab-an-Den 'vel mand eo skrivet anezhañ ; met gwa a-se evit an den-sen en deus gwerzhet Mab-an-Den ! Gwell e vehe bet dezhañ ne vehe ket bet ganet.» Judas neuze, an hini er gwerzhe, en em lakaas ivez da gomz :

«Rabbi, ha me eo ?» Jezuz a respontas : «Ya, el laret 'teus !»

Hag e-pad ma tebrent, Jezuz a gemeras bara, er bennigas, en torras, hag er roas d'e zisipl en ul lâret : «Kemerit ha debrit ; ma c'horf eo kement-mañ». Goude-se, eñ e gemeras er c'halis ha, goude bout trugareket e Dad, eñ er c'hinnigas dezhe en ul lâret : «Evit holl anezhañ, rak man gwad eo kement-mañ, gwad an emglev, an hini skuilhet evit engroez an dud, evit pardon o fec'hedoù. M'el lâret deoc'h : n'evin ket mui adalek bremañ ag ar frouezh-mañ ag ar winienn, bet an deiz mah evin kani nevez, kevret geneoc'h, e rouantelezh ma Zad».

Goude bout kanet ar salmoù eh azont er-maez trema Manez an Olived.

Neuze, Jezuz a lâras dezhe : «C'hwi holl a ya da vout skandalet an noz-mañ diâr-benn ac'hanon, rak skrivet eo : Me a skoay ar bugul, ha bandenn an deñved a vo dispartiet. Met, goude ma vin savet a varv da vev, me a yay en ho-raok e Gallilea». Pier a lâras dezhañ : «Hag e vehe c'h ar re 'rall skandalet diâr-benn ac'hanoc'h, me ne vin ket birviken.»

Neuze Jezuz a zisklerias dezhañ : «E gwirionez, m'el lar d'is, an noz-mañ, ken m'en do kanet ar c'hog, t'ha po ma nac'het dre deir gwezh». Pier a respontas : «Nag e vehe ret din mervel genah, ho nac'hiñ ne rin ket !» Hag rac'h e lârent 'veltañ. Neuze e yas Jezuz gete d'an tachad anvet Gethsemani, hag e lâras d'e zisipl : «Azezit amañ e-pad mah in-me du-hont da bediñ». Hag, àrlerec'h bout kemeret getañ Pier ha daou vab Zebedea, e tas dezhañ en devout aon ha tristez. Neuze eñ a lâras dezhe : «M'eneañ a zo en dristez bet ar marv; chomit amañ ha beilhit genin».

Ha eñ aet un tammig pelloc'h, hag en em daolet e fas doc'h an douar da bediñ, en ul lâret : «Ma Zad, mard eus tu, ra bello doc'hon ar c'halisad-mañ ! Neoazh, ho volonte, ra vo graet ha nepas ma hini». Eñ a zas goude-se da gavet e zisipl, hag o havas kousket ; ean a lâras da Bier : «'Vel-se enta ne hues ket gellet beilhiñ genin un euriad hepken ? Beilhit ha pedit, eit ne gouezhahet ket en tañtasion; gredus eo ar spered met ar c'horf a zo gwann».

Evit an eilvet gwezh e pellas arre hag e pedas 'vel-mañ :

«Ma Zad, mar ne c'hell ket ar c'halisad-mañ tremen hep bout evet genin, ho volontez ra vo graet !» Eñ a zas en-dro davet e Apostoled hag o c'hasas c'hoazh kousket, rak o daoulagad a oa daet da vout ponner. Eñ o laokas arre hag en em dennas da bediñ evit an deirvet kwezh en ul lâret c'hoazh an hevelep komzoù.

Distroñ a reas neuze da gavet e zisiplad, hag e laras dezhe : «Eh oc'h c'hoazh é kousket hag é tiskuzhiñ ? Setu daet an eur ma vo lakaet Mab-an-Den etre dehorn ar bec'herion. Savit ! Deomp ! Tost eo an hani a zle man gwerzhiñ». E oa c'hoazh é komz pa ziboukas Judas, unan ag an Daouzek, ha getañ ur vostad tud, klezañvier ha pennoù-bazh gete, davaet a-berzh an Arc'hveleion hag Henaouerion ar bobl. An treitour en doa roet dezhe ar merch-mañ : «An hani a vokiñ dezhañ, hennezh eo, krogit ennañ.» Ha kentizh e tostas da Jezuz en ul lâret : «Salud, Rabbi ! » Hag e pokas dezhañ. Jezuz avat a lâras : «Ma mignon, da betra ous-te daet amañ ?»

Met neuze int a dostas davetañ hag e taolazont o daouarn àr Jezuz d'en derc'hel. Ha setu unan hag a oa get Jezuz hag asten e zorn, ha tenniñ e glezañv, ha skoeiñ mevel ar Beleg bras ken e droc'has dezhañ e skouarn. Jezuz neuze a lâras dezhañ : «Lak en-dro da glezañv en e c'houhin; rak an nep a gemer ar glezañv a varvo dre ar glezañv. Ha krediñ e hres-te n'hellahen ket pediñ ma Zad, hag e kasahe din a-benn oc'hpenn daouzek armead Aeled ? Met penaos neuze e tache da vout gwir ar Skritur santel hag e lar e tle bout an traoù 'el-mañ ?» Neuze e lâras Jezuz d'an dud :

«Daet oc'h get klezañvier ha pennoù-bazh d'am c'hemer 'vel ma vez graet d'ul laer.

Bemdez neoazh e vezen en Templ azezet é kelenn, ha ne hues ket kroget ennon. Met kement-mañ a zo degouezhet evit ma vo kaset da-benn ar pezh a zo bet skrivet get er brofeted». Neuze rac'h e zisiplad en dilaokas hag a dec'has kuit.

Ar re o doa kemeret Jezuz er c'hasas da di Kaifaz, ar Beleg-Meur : eno o doa en em dolpet ar Skribed hag Henaouerion ar bobl. Pier a heulias a-ziar bell bet porzh ar Beleg-Meur, hag ur wezh aet tre e choukas eno get ar veleion da welet penaos ec'h achivahe an traoù. Neoazh an arc'hveleion hag ar C'huzul a-bezh a glaske ur faos destoni a-enep da Jezuz, evit el lakaat d'ar marv; ha ne gavent hini ebet, daousto ma oa daet e-leizh a faos destoù. An taol diwezhañ e tas daou hag a lâras : «Hennezh eo en deus diskleriet : Me a c'hell diskar templ an Aotrou Doue hag er sevel en-dro e korf tri deiz. Neuze e savas ar Beleg-Meur hag e lâras dezhañ : «Ne respontez netra d'ar pezh a lâr ar re-mañ a-enep d'ah ?» Jezuz avat ne sane grik ebet. Hag ar Beleg-Meur da lâret : «E anv an Doue bev, me a c'hourc'hemen dis lâret deomp mard eo te eo ar Messi, Mab Doue». Jezuz a respontas dezhañ : «Ya, e teuit ag el lâret. Oc'hpenn, m'en diskleri deoc'h : a-vremañ c'hwi a welo Mab-an-den, azezet en tu dehoù d'an Hollgelloudeg, hag é tonet àr gogus en neañv.» Aet neuze ar Beleg-Meur ha regiñ e zilhad en ul lâret : «Blasfemet en deus ! Pezh dober hon eus-ni c'hoazh a destoù ? E teuit ag ar c'hlevet é touiet. Petra a gav geneoc'h-c'hwi ?» Hag int da respont : «D'ar marv e tle bout lakaet !» Neuze en em lakazont da skopiñ doc'h e fas ha d'er skoiñ, lod arall da reiñ fasadoù dezhañ en ul lâret : «Gra deomp da brofet, Messi, lâr deomp piv eo en deus ah skoet ?»

Neoazh, Pier a oa atav azezet er porzh. Ur vatezh a dostaas hag e lâras dezhañ : «Te ivez a oa get Jezuz ar Galilead». Eñ avat a nac'has dirak an holl en ul lâret : «Ne ouian ket petra a lârez». 'Vel mah ae a-benn d'an nor evit monet er-maez e voe gwelet get ur vatezh arall hag a lâras d'ar re a oa an-hont : «Henañ ivez a oa get Jezuz a Nazareth». Pier a nac'has arre en ur douiet : «N'anavan ket an den-se». Un herradig àr-lerc'h, ar re a oa eno a dostaas da Bier

hag a lâras dezhañ : «Sur eo eh ous-te ag an dud-se ivez : splann mat eo kement-se doc'h ha klevet é komz» Neuze en em lakaas da wall-bediñ, ha da douiet ne anave ket an den-se. Kentizh ar c'hog a ganas. Daet soñj neuze da Bier ag ar gaoz en doa lâret Jezuz dezhañ : kent ma kano ar c'hog, te 'po man nac'het dre deir gwezh. Hag, aet er-maez, eñ e skuilhas daroù c'hwerv.

Kentizh 'vel ar mintin, holl an Arc'hveleion hag Henaouerion ar bobl en em dolpas e kuzul a-enep da Jezuz. Ha goude bout liammet Jezuz er c'hasazont da Boñs-Pilat, ar gouarnour, evit el lakaat etre e zaouarn. Neuze, Judaz, an hini en devoe er gwerzhet, a pa welas eh oa bet kondannet Jezuz, e zas kae dezhañ, hag eñ a zakoras an tregont pezh argant d'an Arc'hveleion ha d'an Henaouerion en ul lâret : «Pec'het em eus é werzhiñ gwad un den just !» Met respont a razont dezhañ : «Petra a vern deomp-ni ? An dra-se ha sell». Eañ a daolas neuze ar pezhioù argant er Sanktual, hag en em dennas kuit hag e yas d'en em grougiñ. Met an Arc'hveleion a zastumas ar pezhioù argant-se hag a lâras : «N'eo ket permetet o lakaat en Trezol sakr, rak mand int gwerzh ar gwad». Neuze, àr-lerc'h bout en em glevet etreze, int a brenas gete Park ar Podour da vout bered d'an diavaezerion. Rak-se e vez atav, betek hiriv, anvet ar park-se Park ar Gwad. Neuze e tas da vout gwir komzoù ar profet Yeremias : «Kemeret o deus an tregont pezh-argant, gwerzh an hini a zo bet priziet d'ar briz-se get bugale Izrael; ha roet o deus int evit Park ar Podour, 'vel m'en devoa gourc'hemennet din an Aotrou». Jezuz enta e voe lakaet dirak ar gouarnour, hag henañ en atersas 'vel-mañ : «Te eo a zo roue ar Yuzevion ?» Jezuz a respontas : «El lâret e hues». Met ne responte netra d'an temalasionoù a rae dezhañ an Arc'hveleion hag ar Henaouerion. Neuze Pilat a lâras dezhañ : «Ha ne glevez-te pegement a zroug a ziskleriont a-enep d'ah ?» Met Jezuz ne sane atav grik ebet, ken ne oa souezhet-bras ar gouarnour. Da geñver pep gouel Pask e oa kustum ar Gouarnour da lezel d'ar bobl ur prizoniad bennak; an hini a veze goulennet get ar bobl. Ur prizoniad brudet a oa dalc'het d'ar c'houlz-se, Barrabas e anv. Pa voe tolpet an dud, Pilat a c'houlennas gete : «Pehini a fall deoc'h ma laoskahan deoc'h da vonet ? Barabbas pe Jezuz a vez anvet ar Messi ?» Gouiet mat a rae e oa dre avi o devoe el lakaat etre e zaouarn. E-pad ma oa c'hoazh azezet àr e gadoer-varn, e vaouez a gasas unan da lâret dezhañ : «N'en em velet ket a draoù an den just-se, rak gwall-dregaset on bet hiriv get un huñvre àr e zivout».

Met an Arc'hveleion hag an Henaouerion a lakaas e penn ar bobl goulenn Barrabas ha kas Jezuz d'ar marv. Ar gouarnour, é stagiñ arre get ar gomz, a lâras dezhe : «Pehini ag an naou e fall deoc'h-c'hwi ma reiñ deoc'h ?» Respont a rezant : «Barabbas !» Ha Pilat ha derc'hel : «Ha petra 'rin enta a Jezuz anvet ar Messi ?» Holl e lârazont : «Ra vo staget doc'h ar groaz !» «Peseurt drouk en deus graet enta ?» Kreñvoc'h c'hoazh e krient : « Ra vo staget doc'h ar groaz !» Pilat, é welet ne c'hounie netra hag e kreske muioc'h-mui ar safar, a gemeras dour hag a walc'has e zaouarn dirak ar bobl en ul lâret : «Dibec'h on-me a war an den just-mañ; an dra-se ho sell-c'hwi !» Hag ar bobl a-bezh da respont : «Ra gouezho e wad àrnomp-ni hag àr hor bugale !» Laokel a reas neuze Barabbas da vonet gete en e frankiz. Evit Jezuz avat, goude bout graet en dispenniñ a daolou, eñ el lakaas etre o daouarn evit bout staget doc'h ar groaz. Soudarded ar gouarnour a gasas Jezuz gete er pretoardi, a zastumas en-dro dezhañ ar gohortenn a-bezh. Goude bout eñ diwisket e taolazont ur vantell ruz-skarlek àr e zivskoaz. Gweñ a razont ur gurunenn-spenn da lakaat àr e benn; get ur gorzenn en e zorn dehoù. Hag int da blegiñ ar glin diraktañ en ul lâret, goapaus : «Salut ! Roue ar Yuzevion !» Int a skope ivez en e fas, hag, en ur gemer ar gorzenn, a skoe geti àr e benn.